

AR PERSON BARVEC,

VICTORIUS VAR E ESCOP.

Var ton : MONSIEUR DE CATINAT.

UN Escop eus a Franç, den a galite vras,
 Oc'h ober e vizit ur vech em dromplas :
 Ur Person a gavas hac a voa rust a vin,
 Rac baro en devoa evel ur c'habucin.

Ar Person, a hent all, a voa bisajet mad :
 Tal huel, ha fri caër, ha lêm a zaoulagad,
 Hac a rê e zever ebars en e barres
 Coulz ha ma rê nicun ebars en dioces.

AN ESCOP.

An Escop, p'er güelas, a deuas d'en attaqi,
 Balamour d'e varo, ha d'en inqieti :
 A belec'h, emezàn, nac eus a bez canton
 Oc'h-u deut er vrô-màn evit beza Person?
 Hac ur ministr oc'h-u a doues an heritiqet,
 Pe ur bêleg benac eus ar schismatiqet?

AR PERSON.

Autrou, em'er Person, a drugare Doue,
 N'en don e nep sêçon an eil nac eguile;
 Me gred òn christen mad, catholiq, coulz ha c'houi,
 Ha ne oun qet perac e teuit d'am attaqi.

AN ESCOP.

Ho paro, em'er Prelat, a gavân difêçon,
 Ha ne apparchant qet ouz bisach ur Person,
 Eu amzer Moyses güechal voa permetet
 Douguen ar barvou hir, mes bremâ iqt difennet.
 Pell zo aba eo custum, nep a zo christenien,

D'en em raza qempen, dreist oll ar vèleyen;
 Ne veler barvou hir nemet gant ar Souisset,
 Gant tud a Voscovi pe gant chismatiqet.

Pere zo ridicul en ho c'hompportamant;
 Qercoulz en o barvou vel en ho güiscamant;
 Ha rac-se e cavàn oc'h eus ur fazi bras
 Ne douzit ho paro evit nettât ho faç.

Evel un heretiq ho caver er guis-se;
 Ha goal exempl a roit gant ar baro hir-se.
 Ret ê deoc'h e zroc'ha, pe me rai deoc'h ober;
 N'ouzoc'h qet marteze ouz piou oc'h eus affer?

AR PERSON.

Autrou, eme'r Person, na zispliche ganeoc'h,
 Va baro a zo dîn, hac hoc'h hini deoc'h:
 Gant Doue meus-hi bet, ha ne gredfen biquen
 E ve ret distruja ar pez a ro d'an den.

O barvou zo roet gant Doue d'ar voaset
 Evit o distingui diouz ar femelezet:
 Ar re a fell dezo beza hanval outo,

A renq sur evit güir touza pis o baro.
 Mes me, ne fell qet dîn beza feminizet,
 Na trêc'hi va baro, hac hi dija grizet.
 Ne deo qet Souisset hepquen a zoug baro,
 Meur a bersonach mad pere a zo maro

O deus-hi bet douguet, hac a voa tud santel,
 Tud habil, tud prudant ha christenien fidel;
 Ar Batriarchet côs el lezen ancien,
 Ha Prophetet Doue etouës ar Judevien.

Ebestel hor Zalver, hac an Doctoret bras,
 Evel Sant Augustin, Sant Jerôm, Sant Ambroas,
 Hac ar Pab Sant Gregor, ha Sant Yau Chrisostom.
 Hac ouspen daou c'hant Pab demeus ar guêr a Rom

A velomp zo pintet gant barvou bras hac hir,
 Ha n'o zougjent qet sur, ma n'o devije güir.

-N'int qet bet tamallet gant nicun en o brô ;
 -Qent-se voant enoret balamour d'o baro.

Ha mar o deus douguet ha Calvin ha Luther
 Barvou hir evelté ebars en o amzer,
 Ne deo qet o barvou a zo bet tamallet,
 Nac a zo bet penn-caos ma voant heritiqet.

Ar gabucinet paour na scandalizont den
 Evit douguen barvou etouës ar gristenien.
 Nan, nan, en em razit, grognit nep a garo,
 -Evidòn foëtr biqen ne droc'hin va baro :
 -Güell ê ganén mervel, mar bezàn condaonet,
 Eguet coll va baro, pa e meus-hi maguet.

AN ESCOP.

An Escop en coler a lavar d'ar Person
 E renq en em regli diouc'h uzach ar c'hanton.
 Uzach ar gabucinet, hervez o reglennou,
 Eo douguen, emezàn, ha caout hir ho brayou.

Mes c'houi zo ur Person, n'en doc'h qet cabucin,
 Hac a renq ho paro distaga diouz ho min ;
 Rac-se absolutant, na zisplichfe ganeoc'h,
 Dre va autorite ec'h ordrenàn deoc'h
 -Ma teuot pront d'e zroc'ha, anez certenamant
 -E vezoc'h punisset evel un iusolant.

AR PERSON.

Eur paour qez criminal a vije condaonet
 Da vont d'ar galeou pe da veza crouguet,
 Ne vije qet tristoc'h eguet ma voa'r Person
 Goude beza clêvet e gondaonation.

Autrou Doue, emezàn, hemà'n displijadur !
 Ret e vet em enep cruel ha dinatur,
 -D'am beza condaonet da drêc'hi va baro :
 Nan, nan, güel ê ganén anduri ar maro ;
 -Ha grit a garfot dîn, pa dlefac'h va laza,
 Va baro a virin bete'n heur diveza.

AN ESCOP.

Ar Prelat o velet aheurtet ar Person,
 - En accuzas d'ar Roue hep na güir na rêson,
 Hac a laras dezàn : Sire ho majeste
 E deus va enoret ha roet d'ün qalite.

E deus va grêt Escop ha roet d'ün gallout
 Ebars em dioces da goumandi partout:
 Eur Person paysant a zo em escopti,
 - En deus, var a velàn, c'hoant d'en em revolti.
 - Goab a ra ac'hanòn, ha ne fell qet dezàn
 Oboissa d'am urz, na ne rei, emezàn.
 Justic a c'houlennàn digant ho Majeste,
 Ha condaonation a enep an den-ze.

AR ROUE.

Ar Roue pa glêvas ar Prelat o parlant,
 A lavaras neuze : enues zo insolant;
 Ret eo e chasseal demeus an escopti
 - Ha demeus e barros, evit ma furaï.
 Rentet voe ul lizer sinet gant ar Roue
 D'ar Person d'e barros, hac estonet e voe.

AR PERSON.

- Ia da! emezàn, pa lennas al lizer,
 Bourdet òn er vech-màn, ne douñ qet hep affer.
 Ar Roue a barlant, n'eller qet rezista;
 N'emeus grad da zifen, ret eo oboissa.

- Ha güell ê ganén c'hoas rancout quittä va brö
 Eguet n'en deo rancout distruja va baro.
 - Mes pelec'h e zün-me? Ar Roue ne verq qet
 Pelec'h e fell dezàn e rafen va retret.

P'am eus va liberte, n'ouffen qet ober güell
 Eguet mont da Versaill da velet ar c'hastel.
 Biscoas n'òñ bet eno, hac e clêvàn contâ
 - Ne zeus pales er bed comparachet ountâ.
 - Eno yo, a glêvàn, e velin traou nevez

Ha ne veljen biscoas vardro va zieguez;
 Ar Roue a velin hac e gourtsanet,
 Ha tud ar re vrava a voe biscoas ganet.

C'houi, va baro., zo cauz ma rêr din-me pourmen;
 C'hoant bras zo d'o trêc'hi, mes n'er grafen biqen,
 Ha james disparti entrezomp ne vezo
 Na vezin da guenta condaonet d'ar maro.

Mont a ra ar Barveg da guêr Versaill da chom,
 Arc'hant a gass gantàn ne ouzer qet ar som;
 Bale a ra dre guêr hac en dro d'ar pales,
 A ziabars er güel qercoulz ha diaves.

Güelet a ra ivez ar Roue pa sorti,
 Pelec'h benac e za, ha pa vez o tebri;
 Pa'za d'an oferen e za d'e hevill ive
 Da glêvet ar musiq a rêr d'e Vajeste.

Ne' zeus eno jardin na bali da redeç,
 Galeri, na traou caër, n'o güel tout ar Barveg.
 An dud oll a c'houlen, ouz e velet hardis
 O tostât d'ar Roue, hac o sell outàn pis:

Piou ar bêleg barveg a velomp-ni amàn,
 Na pe a lec'h eff-én? Nê qet eus ar vrô-màn.
 Den ne voar lavaret piou ê, na p'eus a viô;
 Soñezet ê an oll o velet e varo.

AR MARQUIS.

Alafin eur Marqis, mignon bras d'ar Roue,
 A yas da gomz outâ dre guriosite.
 Autrou, emêr Marqis, o comz ouz ar Barveg,
 Diouz hoc'h habillamant me gred e zoc'h bêleg.

Me gar ar véleyen zo mignon d'ar Roue,
 Ha mar oc'h eus affer dirac e Vajeste,
 Me gomzo evidoc'h diouz an affer oc'h eus,
 A rento servich deoc'h dre ar pouvoar a meus.

AR PERSON.

-Ho trugarez, Autrou, emezàn, d'ar Marqis,

-Oblijet bras òn deoc'h demeus hoc'h honestis :

Me zo eur Person qès exilet eus va brô,

-Ha ne meus get a guez hervez m'ê deut an dro.

Nep a vez exilet eus a bers ar Roue

-A gustum detesti, fachat, touet Doue,

-Ha pedi mallozou gant nep zo caos dezo

Da veza exilet, chasseet deus o brô.

Evidòn-m'er, c'hontrol, ne meus chagrin ebet

O sònjal em hini, na d'e beza quitted;

Rac güell e zoun amàn eguet na voan eno :

-Ne-mòn get er guêr-màn a enep va meno.

Em parros ne gaven nemet poan ha trêvel,

Labour epad an deiz, en nôz rancout sevel,

Côves, güelet tud clàn hac ober sarmoniou,

Ha caout poan ha chagrin ha calz a afferiou.

-Amàn e-moun ervad; n'en deus en tout netra

-O troubli va speret, nac ouz va dieza;

Lavarat va brevier, celebri oferen,

Ar rest eus ah amzer a zo din da bourmen.

-Ha seulvui a velàn, emeus plijadurez

O velet traou qer caër pe gaëroc'h c'hoas bemdez;

Contantamant a-meus, mar em boe-me biscoas,

O velet ar Roue, ha mui am bezo c'hoas.

Eur barados biàn e cavàn e bales,

-Hac o sellet ountâ ne enoufen james :

-Ha rac-se, va Autrou, n'emeus grad d'ho pedi

Da harlant evidòn na d'am recommandi;

-Ha qeit ha ma caro va lêzel er vrô-màn,

-Ne c'houlennàn get güell eguet mervel enhàn.

AR MARQUIS.

Ar Marqis a c'hoarze o clêvet ar Person,

-Hac a voa jôa gantàn caout an occasion

Da harlant, emezàn, e presang ar Roue;

-Disqüezet voc'r Barveg, ha gemennet e voe.

AR ROUE.

Ar Roue, p'er güelas, a c'houlennas ountâ :
 -Perac, ha c'houi Person, e zoc'h-u er vrô-mâ,
 Ha ne' zit d'ho parros da viret ho ténved,
 Evel m'ê ho tever ha ma zoc'h oblijet?

AR PERSON.

Allas! Sir, emezàn, mar e-meus-hi quïttet,
 -Ne get me zo qiriec : ganeoc'h oun exilet.
 Evit boïssa da urz ho Majeste,
 Emeus abandonet va dénved er c'his-se :
 Cetu amâ'l lizer; gant ho torn ê sinet;
 Hervez hoc'h ordrenanç emeus oboisset.

AR ROUE.

-Penaos, eme'r Roue, exilet oc'h amâ!
 Pa exilàn-me tud, pell eo diouz ar vrô-mâ.
 Hac ouspen qementse, me ne exilàn get
 -Anes n'am be rêzon : petra' oc'h eus-hu grêt?

AR PERSON.

Mar plich d'ho Majeste va c'hlêvet, emezâ,
 Me gonto deoc'h perac e zòn deut er vrô-mâ :
 Va Frelat, a gredàn, en deus va accuset
 -Dirac ho Majeste, hac en deus ho suadet
 -Balamour d'am baro, e defot e zroc'hâ,
 Cetu eno'r sujet ma tisplijàn dezâ :
 Caër em boa rêzoni ha clasq en em difen,
 Ne brize get selaou ar peza lavaren.

Ret voa din, emezàn, hep rêzoni morse,
 -Trêc'hi crenn va baro, p'otramant e zroc'hje;
 Va humor zo calet, ha ne' meus get ellet
 -Consanti de zrêc'hi anez bout condaonet.
 -Ma vijen chicaner, var boüez dispign arc'hant,
 Em bije gonezet o veza appellant;
 -Mes güell ê bet ganén fiziout er Brovidanç,
 Hac en em resolvi da zouffr poan ar setanç.

Ar setañ zo roet ma vijen exilet,
 Ha gant soumission emeus oboisset,
 O veza güell ganén sortial eus va brô
 Eguet na vije sur distruja va baro.

Ho Majeste, ô Sir! o tont d'am exila,
 Ne lavare get dîn pelec'h en em denna :
 Pelec'h e yazen-me güell d'ober va retret
 Eguet dont da Versail? evel ma zòn deuet?

Nemet er barados ec'h aljen-me pignat,
 Ne vouïjen donet güell evit ober ersat.
 D'ho Majeste, ô Sir! va Frinç ha va Autrou!
 En em soumettàn oll ha d'hoc'h ordrenañcou.

Ho madelez zo bras, credi a ràn certen,
 Hervez ma remerqàn var ho pizach laouen,
 E permettot dîn-me douguen va baro qèz,
 Pa na ra droug da zen, bete fin va buez.

AR ROUE.

It, it, eme'r Roue, achuet ar proces :
 Dalc'hit mat d'ho paro, distroit d'ho parres.
 Daou c'hant scoët ho pezo da ober ho peach :
 Conservit ho paro atao c'hoas ur veach.

An histor zo plèzant evit ar Person qèz,
 Mes evit an Escop n'en deus bet nemet mez.
 Ne barlanter en qær, er pales nac er ro,
 Nemet diouz ar Barveg gant e zoutanen du.

Ar bed oll a lavar en deus eur speret mat;
 Ha nemet goab na rêt partout eus ar Prelat.
 N'en dê get mat d'an dud, dre zomination,
 En em exposi re da gaout confusion.

FIN.

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traòn ru ar Var.